


i MBROURCH



un hent
a gavan

pe a zigoran



kelaouenn

bolitikel

31 Mae 1971

niv. 17

IMBOURC'H, K E L A O U E N N B O L I T I K E L

Niverenn 17

31 Mae 1971

T A O L E N N

Distro ar sarpant-mor, gant Youenn Olier.....	p.113
Ar reverzhi c'hlas, gant Jakez ar Bihan.....	p.129
War-du ar bloaz 2.000, keleier armerzhel.....	p.134
Keleier eus Bro-Euzkadi.....	p.136
E ser afer nevez ar skritur gant Yeun Gourvez.....	p.137
Lizher d'an embanner.....	p.139

Ar pennadoù embannet gant izili EMSAV AR BOBL VREZHON ebarzh

IMBOURC'H ne enouestlont e nep doare an aozadur e unan.

Koumanant-bloaz : Ugent lur (20 lur). K.R. Y. Ollivier, 1 534 25 Roazhon.
Deraouiñ a ra ar c'houmanat-bloaz e miz Genver. Priz an niverenn :
2,00 lur. Ar pennadoù hag al lizhiri a zo da gas da EMSAV AR BOBL
VREZHON (IMBOURC'H), 30 leurgêr al lisoù, Roazhon.

CPPP 50 015

D I S T R O
A R
S A R P A N T - M O R
g a n t
Youenn O L I E R

Moarvat o deus hol lennerion
klevet komz eus ar sarpant-mor-se
a bleustre gwechall doureier
ul lenn skosat brudet hag a oa
anvet "morvil la Loc'h Ness" ;
bep an amzer eta en em ziskoueze
ar morvil farsus-se, bepred
dindan ur stumm nevez, d'ar

mare ma c'hortozed anezhañ an nebeutañ ; ha lakaat a rae
ar gelaouennerion da skrivañ pennadoù e-leizh hag engroezioù
a lennerionda vamiñ.

E Breizh n'hon eus ket bet ar chañs a gaout ar
seurt morvil farsus ; hogen ur morvil all hon eus bet hag
a laka ar gelaouennerion hag ar skrivagnerion da ober kaozioù
e-leizh bep ar mare, bep ugent pe dregont vloaz ; ar morvil
breizhat-se, lennerion ger, a zo anvet morvil ar skritur.

Ma ! Klaskomp memestra bezañ sirius. Gouzout a ra an
holl e Breizh - pe, ma ne ouzont ket e ouezint hep dale -
emeur hiziv adarre o komz eus kempenn ar skritur. An dra-se,
egiz ma lavaren, n'eo ket nevez e Breizh. Abaoe ma skriver e
brezhoneg ne reer nemet kemm ar skritur anezhañ da bep rummad
koulz lavaret. Tra m'odeus ar Saozon, ar C'hallaoued, Kembreiz
pe an Italianed miret an hevelep skritur evit o yezh,,war-bouez
nebeut, abaoe ar grennamzer o deus ar Vrezhoned kemmet hini
ar brezhoneg meur a wech abaoe ur c'hantved.

Da varradoù ar c'hleñved-se e kaver bepred an hevelep
abeg. Da gentañ, distervezh ha skorsted al lennegezh. E-lec'h
ez eus skrivagnerion ha lennerion e-leizh e rank ar yezhoniourion
hag an danvez reizherion skritur derc'hel kont eus boazioù ar
re-mañ : rak, na petra, lennerion ha skrivagnerion a zo techet
da virout ar skritur ez int kustumet outi. An eil abeg a zo

d'ar barroù-se a zo, moarvat, an diouer a Stad Vroadel pe a framm broadel a zeskadurezh : seul aesoc'h eo d'ar saverion skritur c'hoari ma n'eus beli ebet evit reoliñ anezho. Rak reoliñ a ranker bepred ar re a c'hell degas freuzh ha dizurzh en ur gevredigezh ha distrujañ anezhi en diwezh.

C'hoazh e c'helled digareziñ ar reizherion skritur p'o deveze da vennad unvaniñ ar yezh skrivet. Emglev 1908, da skouer, aozet dreist-holl gant Vallee hag Ernod, en devoa da bal herzel ouzh tech skrivagnerion Kernev, Leon ha Treger da skrivañ ar yezh hervez giz o c'horn-bro. Nebeut a gemm en devoa degaset Vallee d'ar mare-se, a-hend-all, e skritur ar Gonideg. Mennad ar gempennerion eta a oa stourm ouzh bruzhunadur ar rannyezhoù ha tamm ebet ober ul labour skiantel. E gwirionez ne oa ket chalet Vallee gant ar "Skiant" ; fellout a rae dezhañ h ken aozañ ur yezh lennegel broadel gouest da gevezañ ouzh ar galleg ha da drec'hiñ anezhañ. E vennoz e oa, egiz hini Roparz Hemon war e lerc'h, e tlee ar rannyezhoù - hag ar gwenedeg en o zouez - mont da get un deiz ha ne chomfe eta, evel skritur unvan nemet doare-skrivañ KLT. E raktres a oa diazezet pergen war ar goulakadur e vije dizeriet buan ar gwenedeg lennegel.

An dizeriadur-se hag eñ gwirheñvel (ken gwirheñvel hag hini ar rannyezhoù all e gwirionez) ne oa ket c'hoarvezet avat e 1941 pa voe anv a-zevri a gelenn ar yezh e skolioù ar Stad c'hall e Breizh. En abeg da se ez asantas Roparz Hemon e 1941 da geal ar skritur peurunvan a zalc'hfe kont en dro-mañ eus rannyezh Wened. Moarvat ne asantas ket d'ar c'heal-se a galon laouen met ur wech graet e soñj e talc'has dezhi. War-bouez nebeut en em glevas ar re a gemeras perzh e breutadegoù a voe renet neuze evit darbenn ar c'hinnigoù a oa bet graet endev gant ar Wenedourion e 1936.

Kempennadur 1936-1941 eta, drezañ e unan, n'en doa ster politikel ispisial ebet, o vezañ ma ne rae nemet kadarnaat

ur bennaem a oa degemeret a bellzo gant aozerion ar yezh lennek : penaos ne c'helle Breizh kaout nemet ur yezh vroadel, ar brezhoneg, ha penaos, ivez, ar yezh vroadel-se ne c'helle gwiskañ nemet ur stumm hepken ; Roparz Hemon, a-hend-all, en devoa lavaret en dije kemeret kerkoulz all doare gwenedek ar yezh lennegel m'en dije bet an doare-se muioc'h a chañs da bourchas ur yezh vroadel unvan da Vreizh.

Ma n'en doa eta kempennadur 1936-1941 ar skritur ster politikel nevez ebet e kemas unan adal ar mare ma voe taget evit abegoù politikel gant ar rannvroelourion pe an nevez-rannvroelourion (ez-vroadelourion a zivar amzer ar brezel) adal 1945. Taget e voe gant an dezo da zivrudañ al labour bet kaset da benn e-pad ar brezel, ar stourmerion o devoa kemeret perzh el labour-se, hag ar vroadelouriezh dre vras. Kontet e voe neuze a bep seurt traoù marzhus ha teñval diwar-benn pec'hed orin ar skritur : penaos e oa bet goveliet war urzh an Alamaned ! Ha me 'oar-me : ur romant polis eus ar c'hentañ.

Anat e teue da vezañ d'ar mare-se e oa plegañ d'an tagadennoù a-enep d'ar yezh peurunvan koulz ha degemer da wir an tamalloù a oa graet d'ar vroadelouriezh vrezhon dre vras. Seul zic'hallusoc'h e oa kilañ war boent ar skritur m'en dije lavaret kement-se e tarbennemp reizhveliezh ar galloud gall a varne ar vroadelourion evel Gallaoued fall ha netra ken ; da lavarout eo, a nac'he ouzh ar Vrezhoned ar gwir da vezañ Brezhoned. Rak eus se e oa kont goude ar brezel.

War ar marc'had, abarzh pell, e voe sklaer ivez ne oa ket hepken divrudañ ar vroadelouriezh a glasked hogen ivez distreiñ an Emsav diwar e roud ha kas anezhañ endro war hent-dall ar rannvroelouriezh. Houmañ, dres, a zegemer ez eo Bro-C'hall mammvro wirion ar Vrezhoned hag ez eo ar galleg o yezh vroadel. Dre se end-eeun ne oa mui ar brezhoneg nemet ur "yezh lec'hel" pe ur "yezh rannvroel" evel ma lavare dres an nevez-rannvroelourion a neuze. Kompren a reer d'ar c'houlz-se ne oa ket dav unvaniñ

ur "yezh" a ranke chom perc'hentiezh prevez ar gouerion ha bezañ miret, dres evel ma oa, e genoù ar re-mañ anvet er garg enorus a ziwallerion ur mirdi yezhoniel. Skritur "skiantel" an ao. Falc'hun a c'helle a-hend-all bezañ aozet diouzh ezhommoù holl rannyezhoù 'Breizh-Izel'. War un dro e klasked sevel ul lennegezh rannvroel, bet skarzhet diouti a zoare pep mennad broadel. N'eus nemet lenn er c'heñver-se pennad digeriñ niverenn gentañ ar gelaouenn BRUD a oa bet diazezet neuze evit kevezañ ouzh AL LIAMM.

Kement-mañ en em gave etre 15 hag 20 vloaz zo. Abaoe ez eus c'hoarvezet meur a zarvoud o deus kemmet saviad Breizh hag ar brezhoneg hag a ziskleir perak ez eo deuet hiniennoù eus ar re a oa a-du betek henn gant ar skritur "skolveuriek" da c'hoantaat e vefe unvanet ar skritur hag an "emsav sevenadurel" war un dro. Da gentañ, c'hwitet eo bet an arnod da sevel ul lennegezh rannvroel e brezhoneg. D'an eil, n'eus ket bet tu betek hiziv da gelenn ar brezhoneg a-zevri er skolioù a-berzh-stad gall pe reolet gant ar Stad c'hall. An trede darvoud a zo bet dizeriadur ar yezh poblek e kornog ar vro (notomp, s ser se, ez eur paouezet a skrivañ e rannyezh Wened abaoe ar brezel diwezhañ). Ar pevare darvoud a zo bet eginadur un tamm emskiant vroadel e Breizh da geñver taolioù ar F.L.B. Ur pempvet darvoud a zo bet anvidigezh un nebeut 'emsaverion' da gelennerion war ar c'heltieg e Skol-Veur Roazhon (dre 'emsaverion' ez intentomp amañ brezhonegourion a implij end-eeun ar skritur 'peurunvan'.) Ouzhpennomp e c'hell an emglev bezañ c'hoantaet ivez gant an danvez emsaverion ha n'o deus ket anavezet prantad ar brezel nag ar goudevezh brezel ha na gomprenont ket mat dre se an abegoù na kennebeut all ster an emgann a zo bet kaset endro d'ar skritur hag a garfe eta reizhekaat un emgav a hañval dezho bezañ diboell.

Lavaret hon eus e oa c'hoantaet an emglev gant hini pe hini eus al ledemsaverion o deus merzet ne gase o folitikerezh kempennelour da neb lec'h hag a garfe tostaat ouzh an Emsav hep

koll o enor evit keloù se. An arbenn pennañ en deus lusket re all avat da gemm o emzalc'h ha da hetañ an unvaniezh ez eo donedigezh 'emsaverion' er Skol-Veur c'hall a oa bet betek henn un dachenn miret evito ; an holl a oar, da skouer, ne vez mui implijet nemet ar skritur peurunvan e kevrenn ar c'heltieg e Roazhon. Bez ez eus o kreskiñ e diabarzh ar gelennadurezh c'hall eil derez, a-hend-all, ur gevarzhe a gelennerion mennet da implijout ar yezh peurunvan. Gallus ez eo e kemerfe ar gevarzhe-se an tu-kreñv e framm kelennerzh ar brezhoneg e diabarzh ar skolioù reolet gant ar Stad c'hall e Breizh. Anat e oa avat da baotred ar gostezenn ledemsavel en em ziskouezfe trec'h ar 'peurunvan' evel hini ur gostezenn he doa harpet ur politikerezh ha na zarbennent ket o unan. E gwir pe e gaou - hogen e gaou, d'hor soñj, rak an Emsav a zo da lec'hiañ er-maez eus an enebadur klasel gall "dehoù" - "kleiz" (1) - ez eo sellet ar skritur peurunvan gant al ledemsaverion evel ur skritur stag ouzh ur politikerezh a zehoù ha kilstourmer ; alese mennad ar re-se hiziv an deiz da zistrujañ ar pezh a zo bañnet ganto evel arouez ur politikerezh a argarzhont. Rak, mard eo bet ijinet ar skritur gant an ao. Falc'hun, e ouzer mat ez eo bet implijet dreist-holl gant ar gostezenn kleizat-kempennelour e Breizh evit en em zistrollañ diouzh an Emsav lec'hiet - e gaou, adlavaromp - a zehoù e meizframm ar politikerezh gall.

Ne gavomp eta en arnod-mañ da gempenn ar skritur ur wech ouzhpenn nemet kendalc'h ur politikerezh kozh dre hentenoù nevez. Gwechall ez eus bet klasket lakaat an Emsaverion da blegañ ha da zilezel o mennadoù politikel dre zoareoù garvoc'h, dre c'hourdrouz, pe dre arverañ pouez ar Skol-Veur hag ar framm gall. Ha dres, m'o deus dibabet deraouerion an oberiadenn nevez hentenoù kuñvoc'h en dro-mañ n'o deus graet, war hor menoz, nemet dre ma ne c'hellont ket mui

(1) Ar c'hiz eo en UDB hag el luskadoù kenstag, ivez e-touez ar gleizelourion nac'hañ e c'hellfe an Emsav chom hep en em lec'hiañ a gleiz pe a zehoù. Hogen ar meizad-se - reizh d'ar c'hentañ sell - o degas hepken d'en em lec'hiañ o unan hag an Emsav war un dro e framm ar politikerezh gall.

nemeur kontañ war ar Skol-Veur-se evit gwaskañ war an Emsav(1).

Moarvat - ha se am eus lavaret endev - an holl re o deus hetet ar c'hempennadur emeur o klask prientiñ bremañ n'int ket lodok gwitibunan er politikerezh kleizat-kempennelour-mañ ; hini an ao. Falc'hun a zo unan kempennelour-gall, koulz hag hini ar "Bleun-Brug" betek hiziv; ouzhpennomp a-hend-all ez eo bet techet an ao. Falc'hun, betek re, da ober eus afer ar skritur e afer personel-eñ e-lec'h e oa enouestlet e enor personel a ouzizieg, pezh a zo ur fazi, a gredomp. Hogen, bezet pe vezet, n'eus mar obet ez eo bet ar gostezenn kleizat-kempennelour breizhat keflusker gwirion ar politikerezh hon eus brastreset er pajennoù a-raok hag ez eo bet implijet ar skritur falc'hunek evit terriñ hengoun an Emsav kent hag e-pad ar brezel, hep ma fellfe din barn amañ an abegoù a c'helle bezañ da gendaoniñ an Emsav kent, pezh a gasfe ac'hanomp re bell.

Evidon-me em eus kredet ne c'heller ket terriñ kendalc'h an Emsav hep terriñ an Emsav e unan, pezh na dalv ket ne zle ket an Emsav bezañ burutellet hag adreizhet bepred. Rak-se o deus ranket an Emsaverion yaouank goude ar brezel en em gannañ war an dachenn dibabet gant o eneberion hag a oa hini ar skritur ; evidon-me em eus keuziet davezañ ranket en em gannañ war un dachenn ken skors ; hogen ne zibab ket un emsav an dachenn ma rank talañ ouzh e eneberion.

Aes tre e komprenan c'hoantadoù ar vrezhonegerion
a zo chomet er-maez eus an emgann hag a ersav ouzh an emgav-mañ

(1) Neptuegezh - da welout - ar Skol-Veur hag ar mererezh gall en afer-mañ ne zle ket bezañ sellet, d'hor soñj, evel un azon a frankizouriezh hogen kentoc'h evel un arouez a zigasted hag a zispriz e-keñver an Emsav koulz hag ouzh al ledemsav deuet da vezañ didalvez hiziv an deiz; rak daou arbenn a c'heller reiñ d'an emzalc'h nevez-mañ. Da gentañ n'eo ket mui chalet ar mererezh gall gant ar brezhoneg; abaoe 20 vloaz ez eo kilet kement ar yezh poblek maz eo marvet koulz lavaret.(kendalc'h en tu all)

evel ouzh un emgav diboell, egiz m'hon eus merket. Moarvat ivez e vefe gwell d'an nerzhoù politikel a zo o kevezañ e Breizh ent digor pe ent dirgel dibab un dachenn stourm all estreget hini ar skritur hag a zo lu a-walc'h egiz m'hon eus lavaret dija. Hogen, dres, daoust hag ez eus e gwirionez ur gudenn eus ar skritur a-hend-all ? Ne gredomp ket. Soñjal a reomp er c'hontrol ez eo kudenn ar skritur e Breizh - evel kudenn a skritur rik - patrom ar fals kudenn e unan. Se a glaskimp diskouez bremañ.

Dav eo deomp gouzout, da gentañ, ne c'hell ar c'henn skritur nemet degas reuz e buhez ar yezh. Trubuilhañ a raio boazioù ar skrivagnerion ha re al lennerion. Emeur war var da rannañ muioc'h an Emsav ma nac'h rumm pe rumm eus hor skrivagnerion degemer ar skritur nevez. An dra-se avat a zo c'hoarvezet endev goude peurunvanidigezh ar yezh e 1941 ; ha c'hoarvezout a ray seul aesoc'h ma n'eus beliezh ebet evit kaougantañ ar skritur nevez, nag emsavel, na stadel gall (gwelet hon eus ne felle ket zoken d'ar mererezh gall emellout e nep doare ar wech-mañ e kudenn skritur ar brezhoneg).

Bremañ eo ret dispenn ar sorc'henn droch a laka tud da embann ez eo roll ar reizhskrivadur skeudennañ distagadur ar yezh kempred. Se a c'hell c'hoarvezout d'ar mare ma vez diazezet skritur ar yezh evit ar wech kentañ. Pal ar reizhskrivadur er c'hontrol a zo aotren d'ur bobl gellout lenn an oberennoù a zo bet savet er yezh vroadel kantvedoù ha kantvedoù goude m'int bet savet. Gwiskañ eta oberennoù skrivagnerion ar c'hantvedoù tremenet en ur skritur a glotfe gant stad soniadel ha gramadegel

(kendalc'h notenn ar bajenn a-raok)
Moarvat e kav d'ar mererezh gall n'eus ket mui tu da adsevel ar brezhoneg evel yezh vev ur gevredigezh. Prest eo eta d'he lakaat kelenn evel ur yezh varv diouzh ma vo kavet a-walc'h a oristaled evit goulenn ma ve kelennet (ha nebutoc'h nebutañ a vo kavet dre ma kilo eñvor ar yezh er rummadoù da zont e Breizh). En eneb e kilwered taer meurbet ouzh an emsav elzasat a zo o tiwanañ dre ma chom an alamaneg bev tre en Elzas bepred evit abegoù liesseurt.

ar yezh a vremañ e Bro-C'hall, e Bro-Saoz pe e Kembre, da skouer, a vefe koulz ha distrujañ peadra lennegel ar broadoù-se. Kompren a ran e klaskfe darn en torratur-se un tu da droc'hañ pep ere gant an tremenet ; hogen o mennad a zle bezañ anavezet evit pezh ez eo gant an holl evit ma c'hellfe an holl ivez en em dermeniñ war e zivoud.

A-hend-all, krediñ e c'hellfe bezañ ur skritur soniadel rik a zisoc'hfe da faltaziañ e vez lennet ur yezh lizherenn ha lizherenn ; n'eo ket se a c'hoarvez avat ; ur yezh a vez lennet ger war-lerc'h ger, pe, zoken, stroll gerioù war-lerc'h stroll-gerioù ; da lavarout eo, ne gaver ket lizherennoù en ur yezh skrivet hogen arouezlunioù soniadel a c'hell bezañ dielfennet diouzh ret, moarvat, hogen a vez bepred merzet a yoc'h gant ar spered.

Ha lakaomp e ve an distagadur da zeskiñ : n'eo ket gant ar reizhskrivadur e tesko unan an distagadur reizh hogen oc'h heuliañ kentelioù ur c'helenner, o pleustriñ ur metou brezhoneger, pe ma ne c'hell ket hag o c'hortoz kement-se, oc'h arverañ pladennoù ha bandennoù ; biken ne c'hell un doare-skrivañ hag hi feal a-grenn ha soniadel rik skeudennañ ervat un distagadur bev.

Hag evel ma n'he devo hor yezh biken un doare-skrivañ skiantel ha feal rik hogen bepred ur skritur bastard, hanter skiantel - sañset - hag hanter hengounel, ne welan ket peseurt gounid a vo o tegas trubuilh er yezh darre war wel ur pal ha na c'heller ket tizhout n'eus forzh penaos.(1)

Pa vez anv a aozañ ur skritur evit ar brezhoneg - pe evit n'eus forzh peseurt yezh - ne c'heller dibab nemet etre div hentenn : hini an hennoaz hag hini ar Skiant. Tu a

(1) Mat eo soñjal ivez en dizurzh a sammo ar yezh pa vo ret kemm geriadurioù ha yezhadurioù, hep kontañ an holl levrioù na vo ket kavet gwerzh dezho dre ma vo bet kemmet - ur wech ouzhpenn - an doare-skrivañ.

zo da heuliañ an hentenn gentañ evit yezhoù ha n'int ket bet skrivet biskoazh ken e ranker, zoken, a-wechoù, krouiñ ul lizherenneg evito. Hemañ a zo degouezh un toullad mat a yezhoù en URSS, da skouer, pe c'hoazh eus an holl yezhoù afrikat (1). An hentenn-se eo a felle d'an ao. Falc'hun heuliañ dres goude ar brezel ; hag eñ neuze a rae meneg eus yezhoù Afrika ha dave da gelennadurezh an UNESCO diwar o fenn pa veze kel gantañ eus ar brezhoneg. Diskleriet hon eus avat perak ne oa ket reizh heuliañ an hentenn-mañ e ser ar brezhoneg end-eeun o vezañ maz eo bet skrivet hor yezh adal ar grennamzer, ez eus bet moulet skridoù enni adal ar XVvet kantved betek hiziv hep astal ebet. Dre se ez eo par an degouezh anezhi da hini ar yezhoù europat all eus Europa ha ne c'heller eta nemet heuliañ hentenn an henvoaz pa vez kont a gempenn ar reizhskrivadur anezhi.

Hogen deomp betek aotren e ve da heuliañ hentenn ar skiant evit diazezañ skritur ar brezhoneg. Gwelout a raimp peseurt skoilhoù a savo dirazomp.

Da gentañ e vo dav divizout piv a vo beliezh war dachenn ar skiant end-eeun. Diouzhtu avat e savo diaesterioù. Daoust ha gervel a raimp war hor sikour ur yezhoniour, ur soniadour pe ur fonologour? Rak ar gwashañ zo eo ne glot ket ar skiantoù-se kenetrezo. Savboent un istorour eus ar yezh, da skouer, ne glot ket dre ret gant hini ur soniadour pe ur fonologour. War ar marc'had, hag int o pleustriñ an hevelep skiant, n'eo ket tonket e vefe ali an holl ouizieion karget da gempenn ar skritur nevez.

En dro-mañ avat e vo c'hoari, me ' respont deoc'h. Rak ma oa gwechall an ao. Falc'hun, da skouer, un heol skedus

(1) An ao. Falc'hun a felle dezhañ krouiñ evit ar brezhoneg arouezioù-dezverkañ a seurt gant ar re a oa bet krouet evit ar yezhoù afrikat-se hogen a-benn ar fin, er pleustr, ez eo bet merzet e c'helled mat tre dioueriñ ar re-mañ (pezh en doa komprenet Vallee pellzo)

e Breizh n'eus ket hevelep kont hiziv. Emañ an ao. Falc'hun a roe sklorijenn d'an-holl gwechall o vont da gavoùt dirazañ kevezerion yaouank ken gouiziek hag eñ war o zachenn-int, leun a entan, hag a roio dezhañ kalz a boan spered.

War ar marc'had peogwir ne vo ket an holl ouizieion-se evit en em glevout moarvat piv a vo karget da vont da dredeog etrezo ? Ar paour kaezh skrivagnerion ha kelennerion ha n'anavezont mann ebet er gudenn hag a savo a-du gant an eil pe egile hervez o mennoziou politikel a gloto gant re ar gouizieg-mañ-gouizieg. Setu, en diwezhholl e vo fardet adarre ur skritur bastard par d'an hini skolveuriek ha na oa nemet un doare distreset ha mastaret eus skritur orin an ao. Falc'hun a oa-hi, da vihanañ, kaer ha skiantel meurbet.

A-benn ar fin, a-hend-all, ar c'hempennadurioù kinniget n'o devo pouez ebet. Kemer a ran degouezh ar c'hensonennoù dibenn. Biken ne vo tu oc'h heuliañ ali ar gouizieg-mañ-gouizieg da reiñ un diskoulm klok d'ar gudenn-mañ. Hag en em c'houlenn a c'heller zoken hag ezhomm zo da glask un diskoulm d'ur seurt fals kudenn (koulz e vefe neuze goulenn digant ar C'hallaoued skrivañ o "liaisons") Neuze, peseurt danvez a zo adarre d'an'emglev' nevez-mañ ?

Hogen deomp pelloc'h c'hoazh. Goulakaomp eta ez eo akord an holl ouizieion - nag ur burzhud ! - ha goulakaomp c'hoazh o devo kavet un diskoulm mat da gement kudenn a savo - pezh a zo dic'hallus, a gredomp - chom a ray ur gudenn all da ziskoulmañ.

O vezañ maz eo bet divizet ne vije kelennet nemet ur yezh skrivet hepken - ar bennaenn-mañ a zo bet degemeret evelato - hag o vezañ ma fell da ouizieion zo kemer da ziazez ar yezh unvan-se ar yezh vev pe yezh ar bobl hepken e vo dav dezho kemer da batrom ur rannyezh strizh a-walc'h a vo dibabet - kaer a vo ober - en un doare tidel ; ha moarvat, hervez ar skiant-prenet hon eus, ez eo gwirheñvel e talvezo en dro-mañ

adarre reolenn an impalaerelouriezh leonat. Hogen, dres, daou damall a c'heller ober d'an teodyezhoù leonat. Da gentañ emaint o vervel buanoc'h marteze eget teodyezhoù all ; ha d'an eil, pell tre ez int diouzh teodyezhoù bro Erec'h maz eo lod anezho ken reizh hag an teodyezhoù leonek, ha buhezekoc'h egeto, ma tezvarner, da vihanañ, diouzh berzh an oferennoù brezhonek er rannvro-se a Vreizh.

Ne gav ket deomp eta ez eus tu d'en em harpañ war deodyezh na rannyezh ebet. Evidomp-ni emsaverion n'eus nemet ur yezh vev, yezh an Emsav an hini eo a zo bet diazezet war ar yezh skrivet

Ha bremañ e raimp ar goulenn-mañ : perak chom hep en em harpañ war ar yezh vev nemeti he deus un dazont sur e Breizh hag a zo yezh an Emsav ? Houmañ moarvat a zo bet stummet diwar batrom ar yezh skrivet henvoazel, an hini a zo bet goveliet tamm ha tamm gant rumadoù a skrivagnerion. Diskleriet hon eus avat e oa un dibab da ober etre hentenn ar skiant hag hini an henvoaz pa veze anv a gempenn ar skritur. Diskouezet hon eus ouzhpenn-se e oa dic'hallus heuliañ hentenn ar Skiant evit abegoù liesseurt (an hini diwezhañ o vezañ ez eo peuzvarv an teodyezhoù brezhonek) ; ne chom eta nemet heuliañ penn-da-benn hentenn an henvoaz. Se avat a zo bet graet end-eeun abaoe deroù ar c'hantved paz eus bet kel a reizhañ ar skritur hag a lavar ivez ez eo bet ar skrivagnerion - hag ar skrivagnerion hepken - kiriek d'ar c'hempennadurioù a zo bet degaset da reizhskrivadur hor yezh, e 1908 koulz hag e 1941 : "emgleo" 1908 hag "emglev" 1941 a zo bet bepred emglevioù skrivagnerion o klask tostaat skriturioù o rannyezhoù an eil ouzh eben hag o lakaat da glotañ.

Maz eus eta un emglev nevez da vezañ skoulmet ne c'hello bezañ adarre nemet un emglev etre skrivagnerion. Hogen peseurt danvez a vefe hiziv d'un emglev nevez a seurt se o vezañ maz eo bet embannet 95% eus ar skridoù embannet e brezhoneg abaoe ar brezel e KLTG - an dra-se a c'hellfed gwiriañ aes - ha dreist-holl n'eus mui hiziv skrivagner ebet,

- koulz lavaret - oc'h ober gant ar skritur 'skolveuriek'
N'eus danvez ebet eta d'ur reizhskrivadur henvoazel nevez -
a seurt gant ar KLTG - , an hini nemetañ a vefe gallus , evel
m'hon eus diskouezet ergentaou, a lavaromp ur wech ouzhpenn.

Moarvat, da heul darvoudoù ar brezel ha d'ar stourm
a zo bet renet war-lerc'h a-enep d'ar skritur peurunvan - ez
eo bet rannet an 'emsav sevenadurel' ha kompren a ran e ve
aet darn skuizh gant ar rannadur-se hag o defe hiraezh d'an
unvaniezh ha d'an emglev a-benn ar fin. Pa soñjer mat avat ne rae
rannadur ar skritur nemet skeudennañ un troc'h all a oa
gwriziennet donoc'h er speredoù hag a zispartie dalc'hidi
ur politikerezh kempennel ha rannvroel diouzh dalc'hidi ur
politikerezh dispac'hel ha broadel.

Unan eus heuliadoù unvanadur ar skritur a c'hellfe
bezañ unvanadur an 'emsav sevenadurel' ; hag an dra-se,
moarvat, a zo mennet gant darn eus atebeion an intrudu-mañ,
da vihanañ. Bez e wisko an arnod-mañ da gempenn doare-skrivañ
ar yezh adarre ur ster politikel dre ret. Rak-se ivez e rank
an holl a zo prederiet gant dazont ar vroad bezañ war evezh
ha klask kompren da belec'h e vint kaset o skoulmañ un emglev
gant stourmerion ha na veizont ket an dazont-se evel ma reont-i.
Merk ur galon vat eo moarvat hetañ an unvaniezh ha ne fellfe
ket din ober fae war ar santimantoù mat hogen a-walc'h a
skiant-prenet am eus evit gouzout n'int gouest da ziskoulmañ
kudenn bolitikel ebet. Rak-se, adanke, e rank unvanadur an emsav dre
hent ur skritur nevez bezañ ensellet diouzh ur savboent
politikel riik.

Dre se, ar pep pouezusañ - a-raok unvaniñ ur skritur
ha n'he deus ezhomm ebet da vezañ unvanet e gwirionez - a vefe
termeniñ ar politikerezh diwar-benn ar yezh ma c'hellfe an
unvaniezh nevez-se bezañ graet endro dezhañ. Evit ar mare avat

/ur

ne verzan-me nemet ster kempennelour d'an arnod unvaniñ nevez-mañ. E devoud ez eo duet an intrudu anezhañ a-berzh kelennerion zo war ar c'heltieg er Skol-veur a oa nec'het o verzout emeur war var da implijout er Skol-veur end-eeun ur skritur ma oa bet staget outi ur ster politikel - faoz a-grenn e keñverioù zo - ha na glote ket gant o dibaboù politikel-int. War ar marc'had, er penn-kentañ, ne zlee an 'emglev' nevez-mañ bezañ skoulmet nemet etre kelennerion ar Skol-Veur ; da lec'hiañ e oa eta e framm an deskadurezh hag ar skolioù gall ; anv a oa eta, a-benn ar fin, a fardañur skritur skolveuriek nevez (1)

Ret mat eo lavarout ne glot ket ar politikerezh rannvroelour a zo endalc'het en amkan berrdizh-mañ gant politikerezh an Emsav a striv da reiñ da Vreizh ur Framm broadel hollek ha da gentañ ur framm kelenn broadel : dre se ivez e sell an Emsav ouzh kelennadur ar yezh er skolioù gall evel un embreg a eil-pouez e par ar stourm a zo da ren e Breizh (evit al led-emsav er c'hontrol ez eo an embreg-mañ an hini pouezusañ) rak unan eus kefridioù pennañ ha mallusañ an Emsav eo dres sevel ar skolioù broadel dishual he deus pobl Vreizh ezhomm anezho.

Ma tle, efin, un emglev bezañ skoulmet e rank an holl vrogarourion bezañ ali diwar-benn ster broadel ar yezh

(1) Arguet e vo e oa bet aozet ar skritur peurunvan evit ma c'hellje ^{ar brezhoneg} bezañ kelennet ivez er skolioù gall. Hogen an amkan-se n'en devoa ket kalz pouez e speredoù an unvanerion a neuze. Ha Roparz Hemon a rene labourioù ar c'hengor unvaniñ n'en em lec'hie tamm ebet e framm an deskadurezh c'hall evel ma ra hini pe hini eus ar re a gemer perzh e breutadegoù ar c'hengor unvaniñ nevez en em vata eus o ferzh a gargiad gall evit difenn o savboent. Ne fell ket din, eveljust, tamall da hini en em lec'hiañ er framm gall. Pep hini a zo dieub da heuliañ e hent politikel hogen, ivez, kement stourmer politikel zo en deus ar gwir da c'houzout da belec'h e vo kaset oc'h ober ar gammed-mañ-kammed. E gwirionez, ster politikel pennañ ar skritur KLTG e voe kadarnaat ster broadel ar yezh. Daoust hag an'unvanadur'nevez-mañ en ÷fe ar ster-mañ? Ne gredomp ket. Moarvat e klaskas eneberion ar peurunvaniñ stagañ ouzh ar KLTG ur ster all ouzh ar skritur peurunvan hogen ar ster-se a oa gaouiat a-grenn ha ne reas an tamalloù e gaou-se nemet donaat an disparti etre an daou rumm a stourmerion.

hag an emgann evit ar yezh ; da lavarout eo, bez e tleont degemer ez int atebek dirak pobl Vreizh hec'h unan evit an emgann-se ha n'eo ket dirak ar mererezh gall evit al labour kargiad gall a raint er skolioù gall.

Hogen, d'hor soñj-ni, war veur a boent all eo e tlefe ar vrugarourion a fell dezho kempenn ar skritur en em glevout evit heuliañ an hevelep politikerezh ha kas da benn a-gevret ul labour efedus. Ar poentoù-se a denn pergen da ster ha pal resis ar stourm evit ar yezh ha n'int ket bet termenet da vat c'hoazh e speredoù lod. Dav eo gouzout ur wech evit mat, da skouer, hag ar brezhoneg a rank chom ur yezh kouerion enket war ar maezioù e-lec'h e krakvev betek hiziv pe daoust ha galvet eo da vezañ yezh vroadel Vreizh, desket ha komzet gant an holl Vrezhoned gwitibunan, kêriz koulz ha ploueziz, kefredwezhourion koulz ha dornwezhourion, Breizhiz ar reter koulz ha Breizhiz ar C'hornog. Kement-mañ zo goulenn hag-eñ en deus an Emsav da zremmañ ouzh ur politierezh advroadelañ hag advrezhonekaat e Breizh - evel Iwerzhon pe Israhel - pe daoust hag a-walc'h e vo dezhañ mirout ar yezh war ar maez e-lec'h e vez komzet c'hoazh - evit pegeit a amzer ? - en ur ober van da zeskiñ anezhi d'un toullad oristaled ha na gavint implij ebet anezhi hag a gomzo galleg er gêr ouzh o gwreg hag o bugale ; da lavarout eo, daoust ha fellout a ra deomp koustet pe gousto e vevfe, e kreskfe hag en em ledfe hor yezh dre Vreizh a-bezh pe daoust hag asantiñ a raimp d'he marv en ur ober neuz da zifenn anezhi ? Hervez an dibab a raimp e vo disheñvel krenn hor politikerezh diwar-benn ar yezh.

Ne gav ket deomp eta, o vezañ pezh ez eo bet istor an Emsav, ez eus tu da unvaniñ ar skritur hep ma ve unvanet da gentañ an Emsav e unan. An unvaniezh vat ne c'hello bezañ diazezet nemet er sklerder. Da bep hini embann e soñj kuit a bep emsteriegezh ha lavarout krenn ha krak piv eo ha petra a venn. Pe ne fell ket da stourmerion zo diskuliañ o gwir soñj diwar-benn ar stourm a zo da gas da benn e Breizh, pe n'o deus

e gwirionez soñj resis ebet o vezañ ma ne glaskont er brezhoneg nemet un "job" pe un "hobby" mat hepken d'o lakaat da c'hounit o bara hep re a boan pe da bourchas dezho un diduamant da zeverrañ o amzer. En un degouezh pe egile ez eo dic'hallus dezho ren ur politikerezh gwirion war hir dermen. Rak ar gwir stourmerion o deus ar gwir da c'houzout war wel da beseurt pal en em gannont ha Pobl Vreizh he deus ar gwir ivez da c'houzout da belec'h e fell d'an Emsav ha d'ar stourmerion vrezhon kas anezhi ; rak-se e kredomp ez eo poent d'ar re-se termeniñ o faliou. D'ar c'houlz-se hepken e vo aes diluziañ afer ar skritur, maz eus ezho e gwirionez d'he diluziañ.

Krennañ a raomp hor soñj evel henn evit klozañ :

Krediñ a reomp ez eus tu da dizhout un emglev war dachenn ar yezh hag ar skritur gant ma vo degemeret ar pennaennoù -mañ :

1) ar c'hengor a vo karget da ziazezañ ar reizhskrivadur nevez a zleo leuriadiñ an Emsav hag ar Bobl Vrezhon ha komz en o anv hepken en un doare anat d'an holl ;

2) sklaer e tleo bezañ e speredoù an holl e sell ar c'hengor-se ouzh ar brezhoneg evel ouzh yezh vroadel Vreizh, dezhi ur reizhskrivadur hepken ;

3) evit an abegoù hon eus displeget er skrid-mañ e tleo ar c'hengor-mañ kemer da ziazez e labour ar reizhskrivadur henvoazel ha klask hepken gwellaat anezhi (dre reizhskrivadur henvoazel e intentomp an hini a zo bet aozet diwar gendeuziñ ar rannyezhoù lennegel kent, da lavarout eo ar skritur peurunvan).

Ma n'eus tu ebet d'en em glevout war an diazezoù-mañ ez eo gwell, d'hor soñj, chom hep koll amzer e breutadegoù aner ha derc'hel d'ar Statu quo. Pep hini, ent prevez, a c'hello ober e zibab. A-hend-all, ne c'heller ket lavarout e c'houlenn ar mererezh gall e ve kelennet ar skritur-mañ kentoc'h eget den.

Ne c'houlenn ket muioc'h e ve unvanet ar skritur. Er c'heñver-se ne sav kudenn ebet evit pezh a sell ouzh kelennadur ar yezh er skolioù a-berzh-stad gall. Ar gwellañ eta a zo lezel pep kelenner, er skol c'hall, da ober gant ar skritur ez eo boaz outi. Kavout a ra deomp e ranker bezañ "fair play" ha damantus er c'heñver-se. N'eus forzh penaos, evel m'hon eus merket, e c'heller a-boan lavarout ez eus hiziv ur gudenn gant ar skritur e Breizh o vezañ ma ne implij mui ar skrivagnerion nemet ur skritur hepken, koulz lavaret, hiziv an deiz.

=====

GERIOU ROUEZ (hervez urzh al lizherenneg)

- A.- ADAOZ AR GLAD (GLADADAOZ) - Réforme agraire. ADKEVREDIGEZH/succursale. AMSTERIEGEZH/ambiguïté. AROUEZLUN/idéogramme. ASKORAD/rendement. ATIL/humus.
- B.- BELIEZH/autorité. BRIENTEK/privilégié.
- K.- KALVEZONIEL/technologique. KANOUC'HELLAÑ/irriguer. KAUGANTAÑ/Sanctionner, confirmer. KEFREDEL/intellectuel. KEFREDWEZHOUR/travailleur intellectuel. KENDERC'HAD/production. KEITAT/moyen. KORVODER/revenu.
- D. - DASPARCHAÑ/répartir. DEGOUEZH/Cas, hasard, circonstance. DIRGEL/caché, clandestin. DISTROLLAÑ/distinguer, désolidariser. DORNWEZHOUR/manoeuvre, travailleur manuel.
- E.- EMGAV/situation. EMVASTEL(pe EMVASTUS)/autarcique. ERSAVIÑ/réagir (ivez en ur ster all : DAZWEREDIÑ pe KILWEREDIÑ(a-enep))
- F.- FEUR/taux.
- G.- GANREIZHAÑ/contrôle des naissances. GWALLVIVIDIGEZH/mauvaise alimentation. GREANTEL/industriel. GWREZVERK/température. GWREZENN/calorie.
- H.- HENVOAZ/tradition.
- I.- IMBOURC'H/recherche (dre vras) IMBOURC'HER/chercheur (hag ivez "pionnier"). IMBOURC'HADENN/recherche(war ur poent resis).
- J.- Y.- CH.- C'H.- L.- M.- MEIZFRAMM/ ensemble de concepts.
- N.- NEVID/marché (dre vras, enebet ouzh MARC'HAD er ster lec'hel.) O.- P.-
- R.- RANNBARZH/région. REIZHVELIEZH/autorité légitime. RIEZ/Etat souverain.
- S.- SAVIAD/ situation. SAVLEC'HIAÑ/faire le point. SEULWEZIÑ/réaliser (er spered, pergen).
- T.- TIDEL/arbitraire. TROVANEL/tropical. U.- V.- W.- Z.-
-

A R R E V E R Z H I
C' H L A S,
g a n t
J a k e z a r B i h a n

Un nebeut bloavezhioù zo e kave d'an holl e oa tonket da riezoù an Trede Bed, dreist-holl ar riezoù aziat poblet ken stank, gouzañv dizale un naonegezh spontus da heul kreskidigezh divent ar boblañs war o douar abaoe ugent vloaz. Skrivañ a reas an douarc'hounezour gall René Dumont ul levr fromus : Nous allons tous à la famine. ("Diwar ar gernez e varvimp holl") a roe pouez adarre da ziaweladoù teñval Malthus e 1798 : edo ar boblañs o kreskiñ buanoc'h eget ar boued er bed hag edo o tont timat neuze poent un drama euzhus evit an denelezh. Gwall chalet gant heuliadennoù politikel an enkadenn-se da-zont e strivas ar Stadoù-Unanet evit skignañ ar ganreizhañ a-vras e broioù an Trede Bed. N'eus ket pellzo c'hoazh e tisklerie Robert Mac na Mara ("Mabarmor"), bet maodiern ar brezel er Stadoù-Unanet hag hiziv pennrener ar Bank Bedel e oa ret groñs mirout ouzh ur miliard a vugale a vezañ ganet en ugent vloaz da zont, er broioù paour, eveljust...

! Hiziv avat ne seblant ket tasmant an enkadenn-se bezañ ken tost en abeg d'ar pezh a zo bet graet anezhi ar "Reverzhi c'hlas", elese kavidigezh seurttennoù nevez a winizh hag a riz, dezho askoradoù uhel-kenañ. Kresket en deus, da skouer, kenderc'h gwinizh India eus 80% er pevar bloavezh diwezhañ (1966-1970), ha krediñ a reer e vasto ar riez-se d'hec'h ezhommoù evit pezh a sell ouzh an edeier adalaek 1972. Kresket eo ivez an eostoù e Pakistan ar c'hornog, eus 60% etre 1967 ha 1969 hag ar riez-se a vast dija d'hec'h ezhommoù daoust ma tegemere betek 1967 brasañ skoazell magadurel ar bed digant ar Stadoù-Unanet, war-lerc'h India. An Inizi Filipinez a enporzhie riz abaoe un hanter gantved o deus deraouet da ezporzhiañ ar riz-se goude bezañ dastumet meur a eost dreistgoñvor. E Selan ivez ez eo kresket an eostad riz eus 26 en tri bloavezh diwezhañ. Emañ ar

reverzhi c'hlas o tizhout bremañ Afganistan, Birmania, Indonezia, Iran, Malezia, Maroko, Nepal, Tunizia ha riezoù arall.

E deroù ar reverzhi c'hlas e kaver labourioù imbours'h-erion norzhamerikat paeet gant an diazezadurioù Ford ha Rockefeller o deus labourer war hadoù o tont eus broioù disheñvel tre. Kaset eo bet da benn an imbours'hadennoù-se e Mec'hiko er bloavezhioù pemont evit evit ar gwinizh hag en inizi Filipinez evit ar riz er bloavezhioù c'hwegont. A-drugarez d'an hadoù nevez-se ez eus bet tu hiziv da zaougementiñ an askoradoù, war-bouez kanouc'hellañ ha degas temzoù-douar. Skignet eo bet buan an hadoù-se dre ma oa o friz izel ha dre ma oa aes kenañ dezho gouennañ a-vil-vern. India ha Pakistan, da skouer, o deus enporzhiet hadoù mec'hikanat d'ur priz par, war-bouez nebeut, da hini an nevid etrevroadel. Gant an 42.000 tonenn en porzhiet e 1967-1968 he deus gellet Pakistan teurel had war-c'horre 500.000 hektar ha gant an eost a zeuas da heul he devoe a-walc'h evit teurel had penn-da-benn d'an diriegezh vroadel (ret e vije bet gortoz e-pad bloavezhioù gant an hadoù kent).

En darn vrasañ eus broioù ar bed ne c'heller dastum nemet un eost bep bloaz dre maz eo ar gwrezverkoù re izel e-pad ar goañv pe an douar re grin e-pad ar c'houlz-amzer sec'h, ha dreist-holl re hir ar c'helc'hiad-dareviñ. Gant an hadoù nevez avat e c'heller dastum daou eost er broioù trovanel pe zamdrovanel e-lec'h e chom kreñv gremm an heol ha klouar ar gwrezverkoù. E Taiwan, da skouer, ne oa ket tu d'ober daou eost e 1950 war 18% eus gorread gounezet an enezenn hogen hiziv e vez graet daou eost en enezenn en he fezh, pe hogozik. Er rannbarzhioù ma ra an dour diouer enno e-doug ar marevezh sec'h (en hanternoz Pakistan hag India, hag e kreiz India, da skouer) e c'heller pebeilañ gounezadur an edeier gant hini ar sorgo, da skouer, pezh a ro tu da dennañ un implij gwelloc'h eus an douar, al loened-labour, an ardivinkoù ha dreist-holl ar boblañs-labour, ha da uhelaat korvoderioù ar gouerion, dre derriñ kelc'h-bac'h an armerzh henvoazel.

A-bouez bras meurbet eo an **araokadennoù**-mañ evit an denelezh rak kudennoù an naon hag ar wallvividigezh a chom e-touez ar re washañ a zo da ziskoulmañ war ar voull-douar-mañ. E Zambia, da skouer, ez eus c'hoazh 260 krouadur diwar vil o vervel abarzh bezañ tizhet ur bloaz, 140 en India ha Pakistan, 82 e Kolombia, (nebeutoc'h eget 25 er broioù greantel diorreet) ; er broioù-hont avat e varv kalz bugale c'hoazh er bloavezhioù war-lerc'h, en abeg da gleñvedoù a bep seurt (tanijenn-skouarn, tanijenn-skevent, redkof gwadek) moarvat hogen ar wallvividigezh an hini eo a zo kiriek d'ar c'hleñvedoù-se e gwirionez. En India ez eus 4 milion a dud dall ha tost da 12 milion a dud hanter-dall diwar-lerc'h an dienez a vitaminoù A. Gouzout a reer bremañ ne c'hell ket an empenn nag an nervennaoueg en em ziorren mat maz eo diank ar proteinoù e bloavezhioù kentañ ar vuhez ; en arbenn ag an diouer-se ivez e vez bihanaet barregezh-deskiñ an dud ha gwastet da viken barregezhioù kefredel ur rummad en e bezh. Ne c'hello ar freuzh-se biken bezañ digollet dre sevel skolioù, goude ma vijent niverus, o vezañ ma ne vo ket ar vugale gouest da zeskiñ.

Direizh meurbet eo dasparzhadur ar pinvidigezhioù er bed a vremañ. Tra m'edo miliadoù a beorion o c'houzañv ha zoken o vervel gant an naon e oa lezet fraost, a-ratozh-kaer, tost da 25 milion a hektaroù a atiloù strujus er Stadoù-Unanet dre ma ne oa ket an nevid-bed evit degemer ar c'henderc'had anezho. E 1960 o devoa ur miliard kant milion a dud ur c'horvoder bloaziek keitat eus 1.070 dollar amerikan ha debriñ a raent o gwalc'h a wrezennoù ; en hevelep bloaz e ranke ur miliard nav c'hant milion a dud tremen gant ur c'horvoder keitat eus 97 dollar diouzh ar bloaz ha diouer a rae dezho, well-wazh, 300 gwrezenn bemdez. Eveljuste oa kalz gwashoc'h an traoù e lec'hioù zo e-lec'h ma rae diouer, ouzhpenn, ar proteinoù pinvidik (kenderc'hadoù loenel, piz, fav). A-bouez-bras eo eta kreskidigezh ar c'henderc'had riz ha gwinizh. Priz ar riz a oa savet eus 120 da 200 dollar an donnennad war-dro ar bloavezhioù c'hwegont a zo digresket kalz abaoe 1968-1969 a-drugarez d'ar reverzhi c'hlas.

Priz ar riz e Bangkok, da skouer, a zo kouezhet eus 25% abaoe deroù 1970. Maget gwelloc'h e c'hello bezañ tud an Trede Bed eta met ret e vo ivez liesaat ar gounezadurioù ha diorren ar magerezh.

N'eo ket ar Reverzhi c'hlas avat al louzoù burzhudus da walennoù an Trede Bed. Ur walenn ken chalus all eo hini an dilabour. Deraouet eo bet kreskidigezh herrus ar boblañs en Trede Bed pemzek pe ugent vloaz zo hag emañ ar re yaouank bremañ o tegouezhout war nevid al labour. Ma ne vez ket roet labour da vilionoù a yaouankizoù en Azia, en Afrika hag e Suamerika e vo gwashoc'h c'hoazh an dispac'hoù politikel ha kevredigezhel a c'hoarvezo er broioù-hont. Gwalenn vrasañ ar bloavezhioù '60 a oa an naon; kudenn vrasañ ar bloavezhioù 80 a vo an dilabour.

War ar marc'had ne c'hell ket ar riezoù paour ezporzhiañ o dreistadoù edeier evit prenañ madoù- hag araezoù-kenderc'hañ rak gwarezelour e teu da vezañ muioc'h-mui ar riezoù greantel. En Alamagn ar C'hornog, da skouer, e save ar gwirioù war ar gwinizh enporzhiet betek 76%, betek 73% war ar maiz, betek 83% war an heiz ken e oa aet priz an edeier uheloc'h en Europa ar C'hornog eget en envid bed. Kement-se a ranker gouzout evit klask un diskoulm sirius da gudennoù ar gounezerezh breizhat. Klask a ra ar C'henvarc'had, mui-ouzh-mui, bastañ d'e ezhommoù evit pezh a sell ouzh ar magadur. Penaos, neuze, e c'hellfe ur riez evel ar Pakistan ezporzhiañ gwinizh pa vez foranet un arc'hant spontus gant Europiz o unan end-eeun evit ezporzhiañ o dreistadoù war an nevid gall ?

A-dra-sur emañ an diskoulm e dalc'h ar riezoù o unan evel m'o deus komprenet mat Chiliiz p'o deus fiziet ar galloud e gouarnamant sokialour Allende e dibenn 1970. Ne c'hello ar Reverzhi c'hlas biken parrat ouzh ádaoz ar gladoù deiz pe zeiz. Warlene c'hoazh e oa perc'hennet 90% eus atiloù Suamerika gant 5% eus ar boblañs hepken hag ez eus un doare gladdalc'helezh o ren alies c'hoazh en Azia hag en Afrika. Ar gouerion binvidik eo o deus tennet korvo dreist-holl eus ar ^Reverzhi c'hlas dre m'o doa douaroù strujus ha kevalaoù

evit degas dour ha prenañ ardivinkoù ha temzoù-douar. E Mec'hiko, da skouer, e savas magadurezh keitat an annezidi bemdez eus 1.800 gwrezenn bemdez e 1940 da 2.650 e 1960; pezh a zo mat tre, met 80% eus kresk ar c'henderc'h a zo bet sevenet gant 3% eus an atantoù. Ne ra ar Reverzhi c'hlas nemet ledanaat alies an dizingalderioù etre ar re bacour hag ar re binvidik, zoken ma laka un dibenn d'an naon. Setu perak ez eus o tiorren, daoust dezhi, emsavadegoù kouerion en Trede Bed, e Bikar, e Kerala, Tanjore ha Bengal ar C'hornog ; ouzhpenn-se e ranker resizañ penaos n'eo ket bet tizhèt c'hoazh gant ar Reverzhi c'hlas holl riezoù an Trede Bed; e 1969 ne veze graet gant an hadoù nevez nemet war 10% eus ar gorreadoù gounezet ha gouestlet d'an edeier er riezoù paour.

A-raok echuiñ e ranker merkañ c'hoazh un dra a-bouez : kaset eo bet da vat tamm-ha-tamm emdroadur ar gounezerezh en Europa hag e Norzhamerika koulz hag e Japan ; maz eo bet garv a-walc'h an emdroadur-se a-wechoù ez eo c'hoarvezet ebarzh kevredigezhioù a oa boaz dija abaoe pell ouzh an araokaat hag ar c'hemmadurioù kalvezel. En Trede Bed, er c'hontrol, ez eus bet degaset en ur ober un nebeut bloavezhioù araokadennoù a oa bet tapet a nebeudoù, a-hed meur a gantved, er Bed kozh ; seurt reverzhi avat a a zegas ur strafuilh spontus er c'hevredigezhioù hengounel. Evit ar wech kentañ e c'hello milionoù a gouerion kustum ouzh an armerzh emvastel kejout gant an nevid ha gant an ugentvet kantved. Bezet pe vezet, unan eus pennañ araokadennoù kalvezel an Istor eo ar Reverzhi c'hlas evit gwellaat amplegoù bevañ an denelezh.

W A R - D U A R
B L O A Z 2.000
K e l e i e r
a r m e r z h e l
gant Per Morvan.

Da heul ar pennad diwar-benn ar reverzhi c'hlas ez embannomp ur pennadig all diwar-benn rakwelioù ar bloaz daou-vil. Evit gouzout ervat pezh a c'heller ha pezh a zleer ober e Breizh ez eo ret anavezout e peseurt bed end-eeun en em gav hor bro - ha peseurt louzoù a fell dezhi degas da reuz ar bed-se.

Hervez Maodiernezh japanat an armerzh e teufe korvoder hiniennel Japaniz da vezañ an hini uhelañ eus ar bed e 1988, ma kendalc'h armerzh Japan da vont war-raok gant an hevelep feur-kreskiñ ha bremañ (+12,9% eus ar c'horvoder keitat dre annezad eus 1957 da 1966, bep bloaz). Aet e vo Japan dreist da Sveden e 1992, dreist d'ar Stadoù-Unanet ha da Alamagn ar C'hornog e 1984, dreist da Vro-C'hall e 1980, ha da Vreizh-Veur e 1974.

O lakaat e tigreskfe un tammig ar feur-kreskiñ japanat (+ 11,9% betek 1986 ha + 1,9% goude), tra ma chomfe heñvel feurioù-kreskiñ ar riezoù greantel all - ez afe Japan dreist da Sveden e 1992, da Alamagn-ar-C'hornog e 1986, d'ar Stadoù-Unanet e 1985, da Vro-C'hall e 1980 ha da Vreizh-Veur e 1974.

Unan eus pouezusañ emdroadurioù armerzhel an ugent vloavezh diwezhañ ez eo bet kreskidigezh an embregerezhioù etrevroadel a zo piaouet 55% eus ar c'hevalaoù anezho gant keodedourion eus ar Stadoù-Unanet, 20% gant Breizhveuriz hag ar peurrest gant Europiz ha Japaniz. N'eus nemet 500 anezho er bed a-bezh hogen e 1968 e voe gwerzhad hollel o nevid brasoc'h eget KBK ("Kenderc'h Bradel Kriz) forzh peseurt riez er bed, nemet hini ar Stadoù-Unanet hag an Unvaniezh soviedel.

Kenderc'h o adkevredigezhioù en estrenvro a zo kresket a 40% buanoc'h eget ar c'henwerzh bedel, gant ur feur keitat 10% bep bloaz abaoe 1950 betek 1970, elese, div wech buanoc'h eget ar c'henderc'h bedel. En abeg d'o lañs kalvezoniel ha d'o arboelladurioù e kav da armerzhourion zo e vo kefleuniet gant 200 pe 300 embregerezh

ramzel ouzhpenn an hanter eus ar c'henderc'h bedel e dibenn ar c'hantved-mañ.

Unan eus techoù heverkañ seurt embregerezhioù etrevroadel o gronnadur e tiriegezhioù brientek zo. E 1967, da skouer, e voe bodet 87% eus postadurioù an adkevredigezhioù norzhamerikat en estrenvro e peder zachenn : bennañ : ijinerezhioù greantel ar c'hehenterezh, an ijinerezhioù kimiek, an ijinerezhioù treloc'hel, hag erfin an ijinerezhioù tredanel hag elektronek.

Ar pep nec'husañ eus an emdroadur armerzhel-se ez eo ar vestroniezh a gemeront nebeut ha nebeut war riezoù zo, ha n'eo ket hepken republikouigoù ar bananez evel an "United fruit" er Gwatemala pe Firestone e Liberia abaoe pell... E 1967 e oa perc'hennet ouzhpenn 50% eus kevala greantel ar C'hanada gant embregerezhioù ar Stadoù-Unanet ha Breizh-Veur, hag heñvel e oa stad an traoù en Aostralia...

=====

Hervez kelaouenn stadegel ar Stadoù-Unanet deuet er-maez e miz Ebrel e vo daougementet poblañs ar bed er bloaz 2.000 ha sevel a ray neuze betek 6,5 miliard a dud.

Bez e oa 3 552 000 000 a dud e-kreiz 1969 (740 milion anezho e Sina ; 537 en India) ; sevel a ray an niver anezho betek 4 miliard e 1985, betek 5,5 miliard e 1990 ha 6 miliard e 1995.

Kreskiñ a ray poblañs ar broioù diorreet eus 1.147 milion e 1975 da 1.453 er bloaz 2.000, tra ma savo poblañs ar broioù all eus 2.874 milion e 1975 betek 5 miliard er bloaz 2.000.

Poblañs Sina a c'hoarvezo eus 825 milion annezad e 1975 hag eus 1.165 milion er bloaz 2.000 ; India a gonto 632 milion e 1975 ha 1.084 er bloaz 2.000 ; an Unaniezh soviedel he devo 255 annezad e 1975 ha 329 milion er bloaz 2.000.

E-kerzh an hevelep prantad ez ay c'hoazh war hiraat padelezh keitat ar vuhez. Eus 1965 betek 1970 e voe hoali keitat ar c'hrouadurioù 74,5 bloaz e Sveden ha 74,1 bloaz en Izelvroioù ; goanag-bevañ an Izelvroioù a vo hep dale hirañ hini ar bed. Eus 1980 da 1985 e

e savo goanag-bevañ ar c'hrouadurioù betek 76,9 bloaz en Izelvroioù ha da 75,3 e Sveden. Eus 1965-1970 betek 1980-1985 e pigno an hoali keitat eus 50 da 59 e Sina, eus 48,5 da 57,8 en India, eus 70 da 71,2 bloaz er Stadoù-Unanet hag eus 70,3 bloaz da 72 bloaz en Unaniezh soviedel.

=====

KELEIER EUS BRO-EUZKADI

Darvoudoù a zo nevez c'hoarvezet en Euzkadi an hanternoz ha n'int ket anavezet betek henn.

Monzon ha Txillardeggi, Euzkariz eus kreisteiz ar vro, kaset kuit eus o bro o doa kroget da Yaou-Bask gant un dilez-boued diharz a-gevret gant 35 kenvroad eus kreisteiz hag hanternoz ar vro (en o zouez ar vreudeur Echave, Zumalde, an it. Arregui, an ao. beleg Bereterbide, ar barzh Marc Legasse) ; goulenn a raent evit Euzkariz ar gwir da vevañ e Bro-Euzkadi ; gouzout a reer ez eo bet rediet rpuidi euzkarat zo eus kreisteiz ar vro da guitaat Euzkadi an hanternoz gant ar gerreizh c'hall.

D'ar 26 a viz mae, d'ar seizhvet deiz eus o dilez-boued ez int dinerzhed kenañ ha Monzon a zo bet ret e gas d'ar c'hlañvdi.

Bras tre eo o c'halon evelkent, a-drugarez da skor an holl vingoned a-du gant an demokratelezh. 40 dilennad o deus goulennet digant ar Prefed reiñ diskleriadurioù. D FEDEDUNAK en deus savet e vouezh. Urzhiañ a reer diwar vremañ ur stourmadenn vouezhiadegoù : 300 Euzkarad eus Paris o deus sinet endev ; kantadoù a Euzkariz eus ar vro o deus graet kemendall abaoe dec'h. An holl re a garfe harpañ anezho a c'hell skrivañ d'an dr. Burucoa, 24 rue Jules Labat, e Bayonne.

Adlavarout a reomp :

- an diferadenn "bellaat" a zo diabeg ; koulz hag ul "lettre à cachet" ez eo ;
- dec'halv ebet n'eo gallus nemet hini ar c'hedveno o vezañ ma n'he deus ket Bro-C'hall sinet Kengrad Europat Gwirioù Mab-den" ;

- Monzon hag Txillegardi a zo Euzkariz, enframmet e buhez hanternoz Euzkadi peogwir e labouront eno, o deus eno o stern bevañ, e skrivont eno o romantoù, o barzhonegoù, o fezhioù c'hoari ("Itziaren semea a vez kanet gant ar yaouankizoù a hiziv ; "Menditarrak" a vez displeget e 'Saint-Jean-Pied-de-Port" ; "Elsa Scheelen" a zo sellet evel ar "romant nevez euzkarek") ...

(Hervez ar gelaouenn ENBATA, stagadenn d'an niverenn 211)

=====

A l i u n e m s a v e r
y a o u a n k

E S E R A F E R N E V E Z
A R S K R I T U R g a n t
Y e u n G o u r v e z

Peogwir ez eo loc'het an dael diwar-benn ar c'hud-
ennoù a sav a-zivout ar
skritur e kavan mat aozañ
ur pennad a savlec'hio ar
gudenn war an dachenn bolitikel.

Ne bledin ket gant lodenn istorek ar stourm evit
ar yezh rak fraezh e teu da vezañ e spered an holl ez eo ar re
o deus ur meizad unvan eus kevredigezh Vreizh a zalc'h d'ar
skritur unvan.

Fraezh eo ivez ez eo bet renet an holl stourmoù
o tennañ d'ar yezh, adalek Roparz Hemon betek Al Liamm, Saded,
Preder, Skol an Emsav, ... o soñjal er gevredigezh da zont ;
Roparz Hemon en lavar mat en e skridoù ebarzh "Ur Breizhad oc'h
adkavout Breizh'.

Fraezh eo an traoù ivez pa seller ouzh emdroadur
ar strivoù renet gant an Emsav : emaomp war ul linenn istorek.
Da gentañ eo bet dic'harzhet an dachenn a-benn unvaniñ ar yezh ;
d'an eil, ur wech unvanet houmañ, savet ul lennegezh arnevez ez
omp degouezhet d'ar mare ma krog ar strivoù renet e ser an emsav
sevenadurel da gemer ur ster politikel hag ar frammoù emsavel da
sevel.

Savidigezh ar frammoù a zo un arouez o tiskouez mat
emañ kevredigezh Vreizh o wriziennañ endro ; se zo ul lodenn eus
an didrevadennañ ; an didrevadennañ-se n'eo nemet ur rann ebarzh
al luskad meur en deus kroget er bed adalek deroù ar c'hantved-mañ.

Klask a ra un nebeut tud er mare-mañ lakaat an
Emsav da gilañ.

- Kilañ avat, evit an Emsav zo dianzav al labourioù
renet en Emsav betek henn ;

- zo ivez nac'hañ meizad ur gevredigezh unvan ha
didrevadennet e Breizh.

Met war un dro ez eo reizh tre kaout meur ouz emzalc'hoù a-
wenet gant an ao. Falc'hun hag e heulierion. Adalek ar mare m'
o deus krouet un doare-skrivañ o rannañ ar gevredigezh ez aent
a-enep da istor ar yezh :

1) peogwir o deus degaset ar strivoù renet gant an
emsaverion unvanadur ar yezh ;

2) peogwir ez eo ar rannyezhoù un dra nevez a-walc'h
en istor ar yezh (kv. A. Fleuriot) ; un azon kleñved ez int, azon
bruzhunadur, dizeriadur frammoù ar gevredigezh ;

3) o tiazezañ o skritur hag o emzalc'hoù war seurt
degouezhioù e tegemerent anezho ha dre se e tegemerent emdro Vreizh
dindan ar Stad c'hall.

Er mare-mañ eta petra eo emzalc'h ar re-se ?

Klask a reont lakaat ar brezhoneg da vezañ kelennet
er skolioù gall ;

- kefiver pleustr : se a c'hell bezañ mat ha tennañ

diganeomp ur bloavezh keleñn d'ober ; evel-se e c'hellimp en em ouestlañ
mañoc'h d'al labour stummañ broadel ;

war un dro all e c'hell bezañ fall peogwir n'emañ
ket ar Stad c'hall o vont d'asantiñ da seurt degouezh hep klask
lakaat an afer-se dinoaz, da skouer o kemer testennoù ebarzh
oberennoù ur skrivagner evel Per Helias ; ar skridoù-se a denn
dreist-holl d'ar gevredigezh war ar maez e Breizh a-raok ar brezel
(aes eo o c'heñveriañ ouzh skridoù evel re Youenn Olier a denn
dreist-holl d'ar gevredigezh vrezhon diazezet, gant kudennoù an amzer a
vremañ ; skridoù Per Helias h.a. avat, a denn an evezh diwar ar
c'hudennoù a sav bremañ hag a stag ar brezhoneg ouzh ar bed
tremenet ;)

- e-keñver politikerezh :

en em ziskouezet eo al ledemsaverion evel
arc'hadourion dreist-holl o c'houlenn digant ar Stad c'hall reiñ
priz da stuzegezh kouerion ur rannvro ha keleñn o "yezh" (pezh a
zo nay rak ma tegemerer ar Stad c'hall e Breizh n'en deus ar
brezhoneg dazont ebet) ;

liammañ a reont dazont ar yezh ouzh divizadur ur
maodiern gall ;

nac'hañ a reont dre se emañ dazont ar brezhoneg
etre daouarn ar bobl vrezhon, e skrivagnerion hag an holl stourmerion
a zifenn anezhañ ;

nac'hañ a reont ivez ez eo dre labour an emsaverion
ha labour Pobl Vreizh a-benn adsevel frammoù kevredigezhel e
Breizh e vo saveteet ar yezh ;

nac'hañ a reont eta ez eo kudenn ar yezh unan
bolitikel.

Hemañ a zo eta emzalc'h al ledemsaverion e-keñver
ar yezh hag e ser se e c'hellomp gwiriañ penaos e klot mat hini
GALV hag an U.D.B. peogwir o deus dre vras an hevelep ersav ouzh
ar Stad c'hall, unan evit pezh a sell politikerezh hag egile evit
pezh a sell ouzh ar sevenadur ; ne lakaont ket e kont bezañs ar
Stad c'hall e Breizh

Met bez e c'hellimp merzout ivez ez eo bet dornataet
an U.D.B. gant al ledemsaverion.

Ar gudenn a sav bremañ :

- gouzout peseurt pal a fell dezho tizhout evit
ober dave d'un emglev war ar skritur ;

- gwanaet an Emsav, tennañ anezhañ diouzh al linenn
treset gant an Istor : unvanidigezh ar yezh, savidigezh ul lennegezh
arnevez ha deroù krouidigezh frammoù ;

- marteze degas ar pare d'o gwander rak emañ fraeshoc'h
fraeshañ evit an holl hag hor skolidi pergen ez eo un diforc'h
politikel an hini a zo etre al ledemsav hag an emsav ;

- anat eo ivez e tleomp chom hep ober emglev ebet
ganto rak an daelerezh a zeu da vezañ taeroc'h-taerañ gant ar
Stad c'hall ;

- n'eo ket ar mare d'un emsav senenadurel evit mat
er-maez eus an Istor ha tostaat ouzh mevelion ar C'hallaoued ;

Merzout a reer bremañ peseurt ster en doa K.A.B. p'eo bet savet.

Merzout a reer n'eo ket poent tabutal war boentoù yezh pe zistagadur.

Ret eo deomp ivez klask savlec'hiañ ar gudenn en degouezhioù politikel a c'hoarvez er bed hag e Breizh pergen. Ar stourm a ren an Emsav sevenadurel a zo ur stourm didrevadennañ ha klask diefennañ an darvoudoù n'eo ket emellout enno.

LIZHER D'AN EMBANNER

"Mantrus eo soñjal ez eus c'hoazh hiziv difennourion zo eus ar yezh hag a gendalc'h da boellata evel ma raed ur c'hard kantved zo ha da ginnig remedoù a c'hellje bezañ bet lakaet da dalvezout e 1940 met na vijent ket gouest zoken hiziv da ampellañ marv ar c'hlañvour. Seurt emzalc'h - mibilus e gwirionez - a zo koulz hag en em dennañ en tremened, nac'hañ ar gwirvoud a vremañ hag a-benn ar fin . diskouez bezañ dileal ha digalon.

Ur gaou eo, da gentañ, embann ez eus hiziv an deiz ur milion a vrezhonegerion, pa vefe kavet a-boan an hanter ma vefe aozet stadegoù en un doare sirius ; ha c'hoazh e vefe ret en em glevout mat war ar ster a ranker reiñ d'ar ger "brezhoneger" rak kentoc'h eget gwir implijerion eus ar yezh e kavfed moarvat tud a anavez ar yezh un tamm bennak met a gomz anezhi nebeut pe fall a-walc'h.

Sotoni eo ivez randoniñ diwar-benn "ar gwir o deus ar vugale da vezañ desavet e yezh o c'havell"- nag a frazennoù teneraus war an divoud-se ! - pa ouezer ez eo galleg a zesk 90% eus ar c'hrouadurioù e Breizh war varlenn o mamm ; an arguzenn-mañ a c'helle bezañ mat tregont vloaz zo ; hiziv avat eo gwall aes treiñ anezhi a-enep deomp ; an dra-se a zo sklaer a-walc'h.

Gwall nay e ranker bezañ evit krediñ e vo tu da dizhout un diskoulm e stern ar Stad c'hall er stumm he deus bremañ ha gant youl-vat ar mererezh gall egiz m'emañ aozet hiziv an deiz.

Rak goude ma teufe ar brezhoneg da vezañ danvez rediek en arnodennoù (ha betek peseurt poent e vefe tu da zesammañ kement-se?) ne rafed ket anezhañ endro, evit keloù se, yezh an tiegezhioù a vo savet warchoazh gant ar vugale a zo er skol er mare-mañ.

Gant kement a aheurterezh bepred e kendalc'her da da zivizout gant bed an tremened, gant ar bed eus dec'h, da glask un diskoulm d'ar gudenn e stern ur gevredigezh c'hall broadelourez, unyezh ha serret warni hec'h unan hep teurvezout teurel ar selloù tro-dro, hep seulweziñ ez eo stern ar "c'hwec'hkogn" ken dizalbadet ha ken dic'hizet hag al linenn "Mginot" hec'h unan ; hep seulweziñ e vo ar gevredigezh eus warc'hoazh, hini bremañ, pa lavaromp mat, ur gevredigezh liesvroadel ma vo ar yezh daremprediñ anezhi ar saozneg, yezh an darempredoù etrevroadel hec'h unan - ha n'eo ket nag ar galleg nag an alamaneg. Kuzhat a reomp kement-se ouzhimp hon unan, marteze evit chom hep reiñ poan spered d'hor breudeur tramor, marteze dre maz omp dallet - hep gouzout deomp - gant bruderezh an "Alliance française" hag aozadurioù all a seurt se ; ar C'hallaoued o unan avat o deus

da verzout an'Dañjer' - daoust da emc'hloar darn eus o renerion - (komprenit an 'Dañjer' a c'hourdrouz impalaerelouriezh yezhel ar C'hallaoued) ; bemdez e kaver en o c'helaouennoù galvadennoù ankeniet. Padal, n'eo ket gourdrouzet ar galleg tamm ebet evel yezh vroadel, eveljust, en Europa da vihanañ ; ar pezh emañ o koll - hag a-enep da gement-se ne c'heller ober netra - ez eo e lec'h a yezh etrevroadel : abarzh dek vloaz ac'hamm en devo peurgollet al lec'h-se.

Moarvat e chomo ar galleg ur yezh kaer a sevenadurezh evel an italianeg pe an alamaneg hogen - an Istor a ra goap evel-se a-wechoù - dont a ra tre e rummad ar yezhoù ordinal, ar yezhoù "lec'hel", er rummad m'emañ ar brezhoneg end-eeun, e skoaz ar yezhoù hollvedel evel ar saozneg, ar rusianeg pe ar sinaeg (ha c'hoazh ez eo arabat disoñjal ar roll a zalc'h ar saozneg er rannvedoù dalc'het gant ar yezhoù diwezhañ-mañ). O teurel evezh mat da chom hep diogeliñ kement-se en un doare re c'hroñs e c'heller lavarout ez eo lec'h ar galleg pe an alamaneg pe an italianeg e-keñver ar yezh hollvedel maz eo ar saozneg heñvel ouzh hini ar brezhoneg pe an euskareg pe ar c'hatalaneg e-keñver ar yezh-se end-eeun, rak a-benn ar fin, ouzh ar yezh-se hor bo afer war-eeun, hap rankout tremen dre hanterour ebet.

Er bed eus warc'hoazh - da lavarout eo hini 1980 rak n'eo ket dav komz eus ar bloaz 2.000 - emomp erru dija. Pep unan a ranko anavezout mat e yezh vroadel-efñ, ha goude-se ar saozneg, ma fell dezhañ bevañ en un doare reizh, dastum deskadurezh, beajiñ, kenwerzhañ war ur blanedenn deuet da vezañ enk kemañ e-lec'h ez eo deuet aesoc'h dilec'hiañ eus ur pennahel d'egile eget eus Kemper da Zol en amzer Nevenoe.

Diwar an elfennoù-mañ : lec'h hag implij etrevroadel ar saozneg, eo e tleomp urzhiañ adal bremañ hor stourm evit ar yezh hag ar vro, hep en em chalañ re gant ar framadurioù didalvoudekaet. Er stourm-mañ e c'hellomp en em vataat eus un degouezh mat ha n'en em vata ket dioutañ Kembreiz hag Iwerzhoniz : ar saozneg n'eo ket un dañjer evidomp, un harp a-enep d'ar galleg alouber, ne lavaromp ket.

Strivomp diwar vremañ - ar pezh a ran va unan - da vevañ hep tamm galleg ebet (se a zeuy da vezañ aesoc'h aesañ er bloavezhioù da zont) ; pa ne c'hellot ket implijout ar brezhoneg, c'hwi a ray gant ar saozneg en ho tarempredoù gant ho mignoned nann-breizhat : e saozneg eo e skrivot d'ho mignoned izelvroat, katalan, euskarat ; e saozneg eo e lennot ar romantoù rusian, alaman pe italian a blij deoc'h (nemet ez anavezfec'h ar yezhoù-se eveljust) ha n'eo ket ebarzh troidigezhioù gallek. Ha ma fell deoc'h lenn "Le Monde", c'hwi a goumananto d'an embannadur saoznek anezhañ, na petra 'ta!

KERVORC'H

Kounañ a reomp d'hol lennerion e c'heller adal bremañ deskiñ saozneg dre ar brezhoneg. Skrivañ da : SKOL AN EMSAV (kevrenn an eil derez), 30 leurgêr al Lisoù, 35 - ROAZHON.

Liesskrivet gant ar gelaouenn CPPP 50015

Ar merour : Y. Ollivier